

*CANTIC spirituel en enor d'an Itron SANTES
ANNA Venet, var Ton Garnilis.*

DRE ur c'honcert ravissant formomp Verz nevez,
da gana joausamant assambles gant an Elez,
da ziscleria d'ar bobl madelez un Doue,
ar ra deomp er Bezennou tensor a garantez.

Mæsquent avanç davantaich, goulennomp ouz Doue
ar sicour, an assistanç, sclerigen eus an Eè,
dre intercession ar Verc'hes graç ar Speret-santel,
da gomposi ur C'hantic da gana e Breiz-Izel.

Disoloet a so breman en Escopty Guenet,
ebars en ur parc labour en parres Pleuneret,
un Imach miraculus eus a santez Anna,
gant Nicolazic den just residant er plaç-màn.

En em rejouissomp, christenien, trugarecaomp Doue,
a ra dimp dre e buissanç graçou bemnos ha de :
en Escopty a Venet bemde o distribuer,
deomp a galon da c'hounit indulgeançou plenier.

Er bloa mil c'huec'h cant pemp-varnuguent assuret,
er seizvet de a vis meurs ema bet disoloet
gant Youen Nicolazic ha pemp den a destou,
ebars en ur parc labour hanvet ar Bezennou.

Roue ha Rouanezet, Marquisien ha Baron,
a zeu da c'houlen sicour da bep affliction :
ha ny pedomp ivez gant carantez parfet,
ar graçou principala a vo deomp accordet.

En Escopty a Venet, ul leo dious a Alre,
e parres Pleuneret, a trugare Doue,
ema an tensor precius, ar vamen a vuez,
soulaich ha yec'het d'ar c'horf ha buez d'an ene.

Ar seizvet de a vis meurs, en dez ma oue cavet
ez eus indulgeanç plenier e santes Anna Guenet,
ar c'huec'hvet de varnuguent eus a vis gouete,

ema gouel santes Anna hac ar solennite.

Eünus eo ar pec'her a obten ar pardon ,
 e iont da santes Anna eus a greis e galon ,
 un tensor precius eo deus ar graçon spirituel ,
 da vonet dirac Jesus , pa garo hor guervel.

Pa erruet e santes Anna , querzet gant carantez ,
 d'adori er Sacramant Jesus guir vap Doue :
 gouillet gant santes Anna , ar Verc'hes hac e map ,
 ar c'hraç evit ma alfet ober ur pardon mat.

Eet da ober neuse , eus a greis ho calon ,
 hervez ma eo ho tever , tro ar brocession ,
 tachet da ober neuse gant guir gontrition
 ur goession barfet ha guir gommunion.

Evit gounit an indulgeanc a so a Rom accordet ,
 eo ret bea pardonet demeure an oll pec'het ,
 roet an alusen d'ar paour , pedet ha goulennet ,
 an oll graçon spirituel a vo deoc'h accordet.

Quant evit quitat ar plag-màn , deut da drugarecat
 an itron santes Anna , ar Verc'hes hac he map ,
 leveret dezi adieu , tensor ar Vreiz-Isel ,
 hor sicouret en amser ma vimp prest da vervel.

Pa viot pell dionz e Ilis , saludet a galon ,
 var benn ho taoulin santes Anna ho itron ,
 ha souch demeure ar graçon ho pezo recevet ,
 ebars er pardon santel pa zouc'h deut d'e guelet.

Laqueet en ho speret bemuos ha bep mintin
 da bidi a galon gant carante divin ,
 santes Anna benniguet , mam d'ar Verc'hes Vari ,
 ha c'hui a recevo sicour ar vrassa diganti.

Santes Anna benniguet , m'ho supli hac ho ped ,
 pedet evidomp Jesus e pales an Dreindet ,
 evit goude hor maro ma zaimp oll da repos ,
 gant ar Sænt hac an Elez er gloar ar Barados.

Amen.

Santes Anna , pedet evidomp.

CANTIC spirituel composet e gloar an Autron
SANT UGEN, en deus ur plag santel e
 parres Prevel en Escopty Querne, eleac'h ma ra
 nombr bras a viraclou en andret ar re er ped
 gant carantez. Ar pardon hac an Indulgeanceou
 plenier ar sul quent gouel Yan, var Ton
 Genovefa, pe var ton Quadry.

TAd eternal, me suppli,
 dre an hano a Jesus-Christ,
 roet din ar c'hraç dre ho carante da finissa erfat va buhe.
 Speret-santel, me ho supli, Dre intercession Mari,
 roet din ar c'hraç ha sclerigen
 da ober ur c'hantic d'ar gristenien.

Autron Sant Ugen benniguet
 pa hoc'h eus bet gant Salver ar bet
 ar c'hraç da breservi var an douar
 ar re ho ped, diouz ar gounar.

Quemense am oblich breman,
 dre sujet eus ar vers-man
 da zont d'ho pidi a galon, Pa zoc'h da Zoue guir vignon.
 Ar c'hantic-mâ, christenien, So composet da s. Ugen
 dre ar c'hraç a Zoue an tad, Hac inspiration va eal-mat.
 Mees quent evit avanç davantaich,
 clevet an oll maleürion bras

a so er bloaz-màn erruet gant cals a dud hac a loenet.
 En Escopty eus a Leon, Ranna a ra siouaz va c'halon,
 e velet ar maleürion bras En deus bet gret an arrachil.

E Ploneour, e Commana,
 eo c'hoarveet ar maleürion-mâ,
 a so tost da menez are, Aprouvet-mat eo quemense.

En Escopty eus a Venet,
 c'hoarvet er vogal ma ententet,

er forest vras a Vrangnilli, Eus clanvet daou vlei enni.

En Escopty eus an Naonet maleüriou bras so erruet,
cals a dud a so devoret gant ur vanden chaç arraget.

En Escopty sant Bric, Cals a dut a so estouet,
gant ur blei a oa arraget Cals a dud a so perisset.

En Escopty eus a Roazon, Calet e vise ar galon,
o velet ar goad o vedec, Gant an dut a oue devoret.

En Escopty a Landreguer, Un nosvez pevar quemener
daou aneze a so surprenet O velet ur c'hi arraget.

Daou aneze a zougue gant respet
al'chue sant Ugen benniguet,
an daou-ze a so bet preservet An daou-all so bet devoret.

Tri c'hrouadur oc'h ouarn loenet,
e Plevin tost da sant Bric
daou aneo a so devoret Gant daou guy a voa arraget.

Tad unan eus a vugale En devoa prenet an alc'hue,
eus a sant Ugen benniguet Ractal en deus-an preservet.

Un den a voa bet d'ar pardon E Quelven gant devotion,
o return d'ar guer var an hent bras,
e rancontr ur c'hi en arrach.

An den-màn a gommanças neuse
pidi Doue var an alc'hue Eus a sant Ugen benniguet,
ractal ema bet preservet.

Un den a voa bet o labourat,
o return d'ar guer eus ar parc,
a rancontras ur c'hui arraget Prest da zevori e briet,

Tostat a reas dezi neuse, Rei a reas dezr an alc'hue
eus a sant Ugen benniguet, O daou ez int bet preservet.

Ur batimant var ar mor bras,
en em gavas e danget vras,
ha madou ha martolodet E voant prest da veza collet.

Unan eus ar vartolodet a zougue gant enor ha respet
alc'hue s. Ugen benniguet, Emaint dre e graç preservet.

Impossibl ve din compren Miraclou an autrou s. Ugen
en deus gret partout dre ar bet
en andret ar re en deus-èn pedet.

Cals a dut en deus preservet
 an Autrou sant Ugen benniguet,
 ha c'hoas e raï bemde Da nep er ped gant carante.

Pedomp a galon parfet, Dougomp e alc'hue benniguet,
 ni vezo gantan preservet
 dioc'h chaç clàn hac arraget.

An alc'hue-mà, christenien, A so digacet da s. Ugen
 gant un aël eus ar firmamant, Pa voa e peden ar sant.

Ha goude an amser-ze, Ema dre brovidanç Doue,
 hac e chomet e Breiz-Ivel, Er barres so hanvet Preivel.

Ema var bordic ar mor bras,
 ne gaver quiet santeloc'h plaç
 a dost d'ar guer eus a Voayen, Ema an Ilis sant Ugen.

Ni hon eus ar bonheur, Breiz-Izel,
 ma ema batisset nr chapel Da sant Ugen benniguet,
 un tensor bras d'ar Vretonnet.

Mar fell deoc'h caout remission,
 dious ho pec'hejou ar pardon,
 deut oll ar sul quent Gouel Yan,
 ez eus paidon er chapel-màn.

Autrou s. Ugen benniguet, Sicouret an oll Vretonnet,
 pere a zoug a vir galon Hoc'h alc'hue gant devotion.

Evit goude ma viomp bet
 gueneoc'h er bet-màn sicouret,
 ma hor bezo ar bonheur d'ho quelet
 etouez ar sænt hac an Elet.

F I N.

*CANTIC en onor an ITRON VARIA GUELVEN
 he deveus ur plaç Santel e Parres Guern en
 Escopty Guennet, var ton Sant Servais.*

ME ho supli, Bretonet, didosteate da glevet
 ur C'hantic spirituel a nevez composet
 an Itron Varia Guelven a ra miraclou bras

e pevar c'horn eus ar bet n'e deves quet he far.

Impossibl e ve d'un den rei jamæs d'an avet
er miraclou a ve groit e Quelven benniguet,
rac n'en deus dez er bet ne ve gulet eno
miraclou bras pere a ve gret e pep bro.

Me goms deoc'h eus un llis, hep iaret gaou er bet,
ar gaëron so batisset emesq ar Vretonet,
hac e ve gulet miraclou nos ha de,
gret gant an Itron Varia Guelven dre Jesus map Doue.

Pa gaver oll ar sicour e Quelven benniguet,
ret e mont a vir galon d'he chapel d'e gulet,
ha pedomp-hi a galon dre garantez parlet,
ar graçou a guelennimp a vo demp accordet.

En Escopy a Venet er barres hanvet Guern,
eno ema ar portret d'an Itron Varia Quelven,
eno ema he fortret, he imach benniguet,
deomp-ni oll Bretonet, var un dro d'he velet.

A Leon hac a Dreguer, a Guerne, a Venet,
me ho supli, bretonet, da vonet d'he gulet,
me ho supli Bretonet, da zonet a galon
dre garantez da Guelven da c'hounit ar pardon.

Me ho ped, martolodet, pere ya var er mor
deit d'ar pardon da Guelven, p'en de digor ar mor,
ha pedit-hi a galon dre ur guir garante,
hi bedo he map Jesus evidomp nos ha de.

Entrezoc'h ar vorizien pere so custumet
da zonet lies d'ar pardon da Quelven benniguet,
ne gollet quet ouz couraich, eus a greis ho c'haou
deit bepret d'e visitein dre vir devotion.

Da Vouel Maria creiz eost, evit ma hententet,
ema certen ar pardon e Quelven benniguet,
ha quement Gouel Maria a ve durant ar blooz,
e ve en Ofiç divin er Chapel santel-ze.

Ha pep sul quenta er mis, c'helaouet Bretonet,
e ve an Offeren-Bret e Quelven benniguet,
ha bemde Offerennou er Chapel santel-ze ;

da enori ar verc'hes so guir vam da Zoue.

Ha deizioù ar sacrament, chelaouet Bretonet,
e casser ar sacrament da Guelven benniguet,
bet en amser a garo e ver accustomet,
da gaç he mabic Jesus d'ar verc'hes benniguet.

Offern-bred ha Gousperou ve eno en deiz-ze;
Benediction Doue pehini ve goude;
orglogeou ar verc'hes a so e pep amser,
adrein he map Jesus a ve var an auter.

Quelven so ur plaç devot, mar deus var an douar,
battisset var ur menez dirac an heaul pa bar;
me ho supli, Bretonet, da zonet d'he guelet,
hac e velait un iliz ar c'haëra so er bet.

C'hui oe clevet lara, ha me quer-couls ha c'hui,
ar re vo devot a Guelhen, vo sicouret gat-hi,
var ar mor, var an douar, e quement lec'h a vo,
mar d'oc'h devot da Guelven, ho sicouro.

Hi e deus bet ar pourvoir gant he map benniguet
evit digaç ar guelet d'ar re ne velont quet,
ha de zigaç en inet d'ar re ve affliget,
ha de zigaç ar vuhe d'ar re a ve budet.

C'hetu bremàn, Bretonet, er recompans hoc'h eus c'hui
evit dont da visita chapel ar verc'hes Vari,
avancet buhan ho pasiou da zont d'e guelet,
dre graç he map Jesus c'hui vo récompancet.

Tostait bremàn, Bretonet, ha c'hui gleo ur mirac
a so bet grêt quet Quelven quet Jesus he map
en andret ur batimant pehini oe var ar mor,
oe en-hi pevar c'hant den hac a yai tout da gol.

Pa velissent ar batimant o vont zaou er mor,
hac int goulen ar verc'hes da zont d'o sicour,
hac int goulen ar verc'hes d'o sicour en amser-ze,
n'o devoa quen esperanc nemet da goll o buez.

Pa ouent bet en em gloastret e Quelven benniguet
ar vern er batimant e voe disquennet,
hac he mabic Jesus deut gat-hi evit e sicour

de sevel er batimant a oe evit da zont ar mor.

Pa savas ar batimant ha tout an dud enni,
neuse-souden e velesent corf ar verc'hes Vari,
hac int mont d'an daulin evit trugarecat
an itron Varia Quelven ha Jesus-Christ he map.

Pa ve ret d'un den croihhuin oll miraclou Quelven,
e ve ret caout ul levr a hanter cant folen,
da lacat er burzudou he deus bet grêt bemdez,
tregont mil pemzec miracl a oude daou gant vloaz.

An nep a ioa da Guelven da c'hounit ar pardon,
a vel oll ar miraclou e trou ar procession.
Deut gant-hi pevarsec miracl a oue abars ar lanne.
Hac a oue groit guet Quelven oll e durant ar bloaz.

Bemde e ra miraclou ar verc'hes benniguet,
var ar mor, var an douar, da guement den he fed,
hac evelse, Bretonet, pedit-hi alies,
an itron Varia Guelven ne vanquai deoc'h jamæs.

Ema ebars ar porcher doc'h hon diguemeret,
hac hi quer caër hac an heaul, loar hac steret,
digor he divrec'h gant-hi evit hon tiguemer
evit hon miret doc'h drouc ha doc'h pep seurt danger.

Itron Varia Guelven, distroit ho taoulagat
deus an oll bardonission a zeu a galon vat,
pere so accoustumet da zont d'ho quelet,
itron Varia Guelven, n'hon abandonet quet.

Itron Varia Quelven, me ho ped a galon
d'ober ur sell a druez ous hon amision,
Guern, Meilrant ha Lamaleu, Malguenac ha Bubri,
Baud, Pleniau, Quistinic, hac er guer a Bondi,
deut da bidi a galon dre ur guir garantez
an itron Varia Guelven d'hor sicour nos a de.

Aça eta, ma brendeur a c'hui ma c'hoareset,
laromp-oll pep a BATER da Guelven benniguet,
pedomp-hi a vir galon dre ur guir garantez,
hi bedai he map Jesus evidomp nos ha de,

F I N.